



Cabinet du Président

**DISCOURS DE MONSIEUR LOÏG CHESNAIS-GIRARD,
PRÉSIDENT DE LA REGION BRETAGNE**

Rennes, le 30 juin 2022

Version française

Seul le prononcé fait foi

Bretonnes, Bretons,

Cher·e·s collègues,

La décision de la Cour suprême des Etats-Unis de révoquer le droit à l'avortement est scandaleuse et rétrograde :

- Je pense aux femmes, toutes les femmes, américaines et celles partout ailleurs dans le monde, qui ne sont pas respectées, et pour qui cette décision est une gifle, une atteinte éhontée à leur droit fondamental de disposer de leur propre corps,
- Le droit à l'avortement nous concerne toutes et tous, c'est une question de droit humain, de liberté, de dignité, d'égalité, et ne l'oublions pas, de santé publique,
- La liberté reste encore et toujours un combat, rien n'est jamais acquis, y compris dans les grandes démocraties et y compris en France où, si ce droit n'est pas remis en cause -et ne devra jamais l'être, le parcours pour avorter demeure un chemin difficile et douloureux, qui nécessite d'être entourée et soutenue, tant par le milieu médical que la société. Au passage je veux apporter tout mon soutien à celles et ceux qui sont engagés sur ce sujet, notamment dans le monde associatif.

L'Europe, qui connaît aussi des mouvements réactionnaires en son sein, s'est montrée ces dernières semaines sous son meilleur jour :

- Le Conseil européen a ouvert la voie à une adhésion future de l'Ukraine à l'Union européenne. Décision majeure qui rappelle que l'Europe ce n'est pas que de l'économie mais bien un espace politique qui partage des valeurs. La guerre continue, ne l'oublions pas et nous accueillons tous les jours en Bretagne des réfugiés. Et je veux saluer tous les maires qui s'engagent et particulièrement la Maire de Rennes et son équipe qui prennent largement leur part.
- La confirmation de l'entrée dans l'Euro de la Croatie l'an prochain est aussi un bon rappel à tous les oiseaux de mauvais augure que l'Europe est une puissance monétaire qui protège. Imaginons un instant où nous en serions aujourd'hui en termes d'inflation et de désordres financiers sans l'Euro.
- Et puis les votes fondateurs du Parlement Européen :
 - Pour sortir de la voiture thermique et donc nous pousser à inventer la mobilité de demain, à produire les nouveaux services et les nouvelles technologies nécessaires, la Bretagne est engagée sur ce chemin, il ne sera pas simple mais il vaut mieux agir que subir l'inéluctable. La meilleure place du pétrole est sous terre.
 - Pour instaurer une taxe carbone à nos frontières qui viendra nous accompagner pour réduire le carbone et faciliter les relocalisations. Ce sujet n'est pas sans intéresser l'avenir du site de la Fonderie de Bretagne que nous suivons au jour le jour.
- En ce dernier jour de présidence française, je veux saluer les avancées remarquées et qu'il convient de poursuivre et de réaliser concrètement.

Après les USA et l'Europe, la France :

Avant de parler des élections nationales, un mot sur l'énergie. Nous sommes en risque pour la fin de l'année et il nous revient, nous pouvoir public, d'avoir une parole forte sur la sobriété.

Nous pouvons en Bretagne et en France connaître des blackouts si nous ne faisons rien.

Je propose d'ores et déjà que nous relançons notre outil Ecowatt assez vite. Je sais les Bretons très engagés sur ce sujet.

Cette situation qui se profile confirme la pertinence des choix stratégiques que nous avons fait dans cet hémicycle pour accroître notre autonomie énergétique, notamment avec nos investissements dans les énergies marines qui produiront leurs premiers électrons au printemps prochain.

Pour revenir au contexte électoral :

- Nos élections nationales qui rythment la vie politique de notre pays sont passées. Emmanuel Macron a été réélu Président de la République. Les Français ont élu leurs représentants à l'Assemblée nationale.
- Je salue tous les députés de cet hémicycle et particulièrement ceux de ma majorité sans oublier celles et ceux qui ont été candidats.
- Je souhaite travailler avec tous les parlementaires au service de l'intérêt général de la Bretagne, c'est en équipe que nous pourrons porter fortement la voix de la Bretagne à Paris. Je les rencontrerai dès la semaine prochaine.
- Au niveau national, la concorde qui s'installe traditionnellement après les élections n'est pas là.
- Les Français, pour ceux qui se sont exprimés, ouvrent la voie à un régime parlementaire « façon propositionnelle » tout en montrant de profondes divergences de vue pour l'avenir.
- Les grands projets qui méritent d'avancer ne manquent pas :
 - Réussir les transitions, refonder notre système de santé, corriger les inégalités sociales et générationnelles, répondre à la crise du logement, travailler les grandes questions de sécurité, le renforcement de l'Europe et de sa place dans un monde aux polarités de plus en plus puissantes et au rapport de force de plus en plus militaires...
 - Et bien sûr le pouvoir de vivre que je préfère au pouvoir d'achat car la vie ne peut se résumer à acheter. Un projet économique qui veut réussir les transitions ne peut être tourné exclusivement sur toujours plus de consommation. Par

contre notre contrat social ne peut fonctionner que si chacun peut vivre dignement,

- Je souhaite que des majorités de projet puissent se trouver : que l'on n'hésite pas à prendre le temps de travailler et à sortir des slogans dictés par la pression des réseaux sociaux, bref que l'on ne parie pas sur l'échec et le blocage.

Du fait de notre France trop jacobine, Paris bloqué peut se traduire par toute la France bloquée. Pensons aux gens pour qui nous sommes là et pour lesquels nous avons besoin d'engager plusieurs chantiers.

Je suis convaincu que nous pouvons sortir de cette situation nationale par le haut, faisons de ce moment, un temps de renouveau démocratique pour notre pays.

Nos aînés du CELIB peuvent inspirer, au-delà de nos frontières, avec leur slogan « associer les volontés, respecter les sensibilités ».

Je préfère la constance qui permet de construire au bruit et à la fureur qui ne transforment rien.

Nous pouvons sortir par le haut en osant plus d'autonomie pour les territoires. Cette situation à l'Assemblée nationale invite nos parlementaires, notre gouvernement à se concentrer sur l'essentiel car s'il faut trouver des compromis sur tout, y compris les moindres détails, alors oui la France sera bloquée.

Pour se concentrer sur l'essentiel de ce qu'est l'avenir d'une nation, une étape sera de donner plus de responsabilités aux régions, je suis convaincu qu'au vu de la situation, ce sera une libération pour notre organisation jacobine plus qu'une privation.

Les affaires internationales occupent largement le cerveau du Président de la République, nos Ministres ont des combats à mener à Bruxelles et sur les grands projets, alors faisons l'équipe de France en s'appuyant sur les régions et les collectivités.

Je suis prêt à saisir toutes les opportunités qui permettront à la Bretagne de faire avancer son projet avec le gouvernement, avec le parlement, avec le Président de la République, avec la force des élus bretons.

Sur le sujet de l'autonomie, notre groupe transpartisan tombe à point pour faire des propositions, montrer que la Bretagne a des convictions, qu'elle sait les défendre mais surtout qu'elle sait proposer.

Mes cher·e·s collègues,

Cette session mettra à nouveau le quotidien des Bretons et l'avenir de la Bretagne à l'ordre du jour :

Nous aurons des premiers échanges sur notre stratégie régionale des transitions économiques et sociales. N'ayons aucun tabou. Les mutations qui se profilent sont massives tant au niveau économique, social et environnemental.

Nous ferons un point sur nos lycées et sur la façon d'investir pour être utile autant aux lycéens qu'à la planète.

Nous accueillerons la chambre régionale des comptes pour nous présenter leur rapport sur les algues vertes. C'était une proposition issue de notre assemblée. Nous aurons en octobre un débat sur les propositions de la Région pour poursuivre la lutte contre ce fléau. Il faut montrer toute la transparence afin de pouvoir ensuite débattre sereinement des nouvelles solutions à mettre en place. Enfin, nous adopterons, je le souhaite, nos orientations pour revaloriser la profession de chauffeur pour les transports scolaires. Ils sont indispensables. Ils sont le dernier maillon de notre chaîne et doivent donc être respectés en conséquence. Je veux dire que les métiers de service sont des très beaux métiers, le confinement nous l'avait rappelé. Ne l'oublions pas.

Voilà un an que les électeurs et les électrices nous ont élu, Leur confiance m'honore toujours un an après.

Merci à mon équipe, merci à vous toutes et tous tout bancs confondus pour le travail réalisé.

Et je voudrais finir ce propos par le sujet de l'eau au moment où se tient le carrefour des gestions locales de l'eau en Bretagne.

La Bretagne est singulière dans bien des domaines dont celui de l'eau par sa configuration géographique, son sol granitique, ses multiples petits bassins versants.

Cette singularité légitime d'avoir une réflexion collective à l'échelle de la Région, c'est le sens de l'assemblée bretonne de l'eau. Mais cela ne suffira pas, il faudra aussi des actions collectives, concertées, communes.

Parmi les défis à venir, nous avons celui de la prise de conscience que rien n'est jamais acquis tant pour la qualité de l'eau (mais ça nous en avons conscience) que pour la quantité. N'attendons pas de manquer d'eau pour prendre conscience que notre système est fragile.

Nous aurons à travailler de mon point de vue autour de trois ambitions : L'anticipation parce que notre région est attractive et aura des besoins de plus en plus forts,

La sobriété parce que l'eau est notre premier bien commun et un bien commun on n'a pas le droit de le gâcher,

Et la solidarité parce que si l'eau c'est la vie, que l'eau est en centre Bretagne, alors le centre Bretagne c'est la vie donc la solidarité est à mettre au cœur de notre action.

Anticipation, Sobriété, Solidarité,

C'est finalement un beau triskell pour ouvrir nos débats. Je vous remercie.



Kabinet ar Prezidant

**PREZEGENN AN AOTROÙ PREZIDANT
LOÏG CHESNAIS-GIRARD,**

Roazhon, an 30 a viz Mezheven 2022

Doare brezhonek

Ar brezegenn wirion a zo an hini distaget

Bretonezed, Bretoned,

Kenseurt-ez-ed kaezh,

Ur vevh hag ur pezh pazenn war-dreñv eo an diviz kemeret gant Lez-veur ar Stadoù-Unanet evit lemel ar gwir da ziforc'hañ :

- Emaon o soñjal er merc'hed, an holl verc'hed, an Amerikanezed hag ar re all er bed a-bezh na vezont ket doujet, evito ez eo an diviz-se evel ur flac'had, un taol gwidal enep o gwir diazez da vezañ mestr war o c'horf,
- Ar gwir da ziforc'hañ a sell ouzhimp-holl, un afer a wirioù an denelezh eo, a frankiz, a ingalded, hag a yec'hed foran, arabat dimp ankouaat kement-se,
- Ret eo stourm evit ar frankiz c'hoazh hag adarre, n'eus netra hag a vefe gounezet da viken, en demokratelezhioù bras hag all, e Frañs hag all ; amañ, daoust ma n'eus ket kaoz da lemel ar gwir-se – ha ne zleo bezañ kaoz d'en ober biken – ez eo diaes ha poanius an hent betek an diforc'hidigezh, ret eo d'ar maouezed bezañ harpet, kaout tud war o zro, koulz eus bed ar vezegiezh hag eus ar gevredigezh mod-all. P'emaon ganti e fell din lavaret ez on a-unan gant ar re a vez o reiñ bec'h war an dachenn-se, er c'hevredigezhioù dreist-holl.

Er sizhunioù diwezhañ e oa bet diskouezet he zu gwellañ gant Europa, ha pa vefe luskadoù kilstourmer enni ivez :

- Digoret he deus an hent da Ukraina war-zu un emzeladur en Unaniezh Europa. Un diviz pouezus-kenañ eo hag a zegas da soñj dimp ez eo Europa ouzhpenn un takad ekonomikel, un takad politikel ennañ soñjoù diazez boutin eo ivez, ha da gentañ-penn. N'eo ket echu ar brezel, arabat ankouaat se, ha degemer a reomp repuidi bemdez e Breizh. Fellout a ra din reiñ gourc'hemenoù d'ar vaered a vez o reiñ bec'h, dreist-holl Maerez Roazhon hag he skipailh hag a ra ouzhpenn o lod.
- Kadarnaet eo ar fed en em gavo Kroatia ar bloaz a zeu e-barzh takad an Euro, mat eo evit degas da soñj d'an dud a wel an traoù war o zu fall atav ez eo Europa ur c'halloudezh evit ar moneiz hag a warez ac'hanomp. Klaskomp soñjal e peseurt stad e vefemp a-fet kresk ar prizioù ha dizurzh e bed an arc'hant paneve an Euro.
- Ha mouezhiadegoù e Parlamant Europa evit traoù diazez :
 - Evit paouez gant ar c'hirri-termek ha diwar se broudañ ac'hanomp da ijinañ fiñvusted an amzer-da-zont, da broduiñ ar servijoù hag an teknologiezhioù nevez a vo ret ; krog eo Breizh da vont war an hent-se, ne vo ket aes met gwell eo ober kentoc'h eget gouzañv ar pezh a zo tonket da zegouezhout forzh penaos. Dindan an douar emañ ar plas gwellañ evit an tireoul.
 - Evit krouiñ un taos karbon war harzoù Europa hag a sikouro ac'hanomp da zigreskiñ ar c'hementad karbon taolet ganimp hag aesaat adstaliañ embregerezhioù en hor broioù. Sellet a ra kement-se ouzh amzer-da-zont lec'hienn Teuzerezh Breizh a vez evezhiet ganimp a zeiz da zeiz.
- P'emaomp en devezh diwezhañ m'eo prezidet Europa gant Frañs e fell din lavaret ez on laouen o welet eo aet an traoù war-raok hag eo ret delc'her war an tu-se ha kas an traoù da benn.

War-lerc'h ar S.U. hag Europa, komzomp eus Frañs :

A-raok lakaat ar gaoz war ar votadegoù broadel, ur gomz diwar-benn an energiezh. Emaomp en arvar evit fin ar bloaz ha dimp-ni eo, ar galloudoù publik, da lavaret an traoù sklaer a-zivout

digresk beveziñ an energiezh. Ma ne vez graet netra e c'hallimp en em gavout hep tredan e mareoù zo e Breizh hag e lec'h all e Frañs.

Diwar vremañ e kinnigan deoc'h adlañsañ hor benveg Ecowatt hepdale. Gouzout a ran e vez roet bec'h da vat gant an dud e Breizh war ar sujed-se.

Ar pezh a spurmantomp evit an amzer-da-zont a ra dimp soñjal e oa bet graet ar choazoù strategel mat ganimp er vodadenn-mañ evit kreñvaat hon emrenerezh energetek, dreist-holl lakaat arc'hant en energiezhioù-mor a vo krog da broduiñ en nevezamzer a zeu.

Kement ha degas da soñj eus disoc'hoù ar votadegoù :

- Tremenet eo ar votadegoù broadel a vez o reiñ he lusk d'ar vuhez politikel e Frañs. Addilennet eo bet Emmanuel Macron evel Prezidant ar Republik. Dilennet eo bet o c'hannaded er Vodadenn Vroadel gant ar Frañsizien.
- Saludiñ a ran an holl gannaded a zo er vodadenn-mañ, dreist-holl ar re a zo er muianiver ganin, anez ankouaat an holl re a zo bet war ar renk.
- Fellout a ra din labourat gant an holl gannaded evit mad Breizh, asambles eo e c'hallimp lakaat mouezh Breizh da vezañ klevet kreñvoc'h e Pariz. Mont a rin da gejañ ganto ar sizhun a zeu.
- E Frañs n'eus ket eus an emglev a zeu dre gustum da-heul ar votadegoù.
- Ar Frañsizien, ar re a oa bet o votiñ bepred, o deus heñchet ar vro war-zu ur renad parlamantel « mod kinnigoù » ha war un dro e teu savboentoù enebet krenn war wel evit an amzer-da-zont.
- Bez' ez eus chanterioù bras a-leizh hag a ranko mont war-raok :
 - Kas an treuzkemmoù da benn, adframmañ hor reizhiad yec'hed, reizhañ an dizingalderioù sokial hag etre ar remziadoù, ober war-dro an diaezamantoù a-fet lojeiz, en em soñjal war an dalc'hoù bras e-keñver surentez, kreñvaat Europa hag he flas en ur bed m'eo kreñvoc'h-kreñv ar poloù ha troet ar c'heñverioù nerzh muioc'h-mui gant doareoù an armeoù...

- Hag evel-just emañ ar galloud bevañ – gwell eo ganin ober gant se eget gant galloud prenañ rak ouzhpenn prenañ a vez graet er vuhez. Ma fell dimp diazezañ un ekonomiezh evit kas an treuzkemmoù da benn n'hallomp ket goulenn dalc'hmat muioc'h-mui a vezeziñ hepken. Evit hor c'hevrat sokial avat, n'hall ket mont en-dro paneve e c'hall pep hini ac'hanomp bevañ en ur mod dereat,
- Fellout a ra din kavout ar muianiver a-du gant ar raktres-mañraktres : dav e vo kemer amzer evit labourat asambles hag evit al luganioù a vez gourc'hemennet dimp gant ar rouedadoù sokial, lezomp anezho a-gostez ; e berr-gomzoù chomomp hep klask lakaat an traoù da c'hwitañ pe da chom sac'het.

Kreizennet eo Frañs betek re, rak-se e c'hall Pariz skoilhet talvezout kement ha Frañs skoilhet en he fezh.

Soñjomp en dud emañ evito hag a rankomp reiñ lañs da veur a chanter evito.

Sur on e c'hallimp en em dennañ eus ar blegenn vroadel-se hep bezañ koll ha ret e vo d'an degouezh-se bezañ ur mare ma vo adroet lañs d'an demokratelezh en hor bro.

Gallout a reomp, hag an dud a lec'h all ivez, kemer skouer war an dud araozomp er CELIB gant o ger-stur « bodañ ar youloù, doujañ ar savboentoù ».

Gwell eo ganin an dalc'husted a c'haller sevel traoù ganti, kentoc'h eget an trouz hag ar fulor na cheñchont netra.

Gallout a reomp en em dennañ hep bezañ koll ma vez kredet reiñ muioc'h a emrenerezh d'an tiriadoù. Er stad m'emañ ar Vodadenn Vroadel eo dav d'hor c'hannaded lakaat o spered da soñjal er pep pouezusañ rak ma vez ret kavout emglevioù evit pep tra, en disterañ munudoù hag all, e vo skoilhet Frañs, sur.

Evit soñjal er pep pouezusañ a ya d'ober amzer-da-zont ur vroad e vo ret, ur mare bennak, reiñ muioc'h a varregezhioù d'ar rannvroioù ha diwar neuze on sur, pa weler e peseurt stad emañ an traoù, e vo ur frankiz e-keñver hor framm kreizennet kentoc'h eget un diouerañs.

Troet eo al lodenn vras eus spered Prezidant ar Republik war-zu an aferioù etrebroadel, ret eo d'hor Ministred stourm e Brusel hag evit an oberoù bras, neuze savomp skipailh Frañs diazezet war ar rannvroioù hag ar strollegezhioù.

Prest on d'ober kement a vo gallet evit lakaat Breizh da vont war-raok gant he raktres asambles gant ar gouarnamant, ar parlamant, Prezidant ar Republik, ha gant youl an dilennidi eus Breizh.

Evit a sell ouzh an emrenerezh, degouezhout a reomp mat gant hor gronn ennañ tud eus meur a strollad evit ober kinnigoù ha diskouez ez eus soñjoù diazez sonn gant Breizh ha gouzout a ra difenn anezho, ha dreist-holl eo gouest da ginnig traoù.

Kenseurt-ez-ed kaezh,

E-kerzh an dalc'h-mañ e vo kaoz adarre eus buhez pemdez ar Vretoned hag eus amzer-da-zont Breizh :

Bez' e vo ar c'hendivizoù kentañ diwar-benn hor strategiezh er Rannvro evit an treuzkemmoù ekonomikel ha sokial. Arabat dimp lammat dreist sujed ebet. Koulz evit an ekonomiezh, an dachenn sokial hag an endro ez eus cheñchamantoù bras a-leizh da zont.

Gwelet a raimp e peseurt stad emañ an traoù evit hol liseoù hag evit ar mod da lakaat arc'hant abalamour da vezañ efedus koulz evit al liseidi hag evit hor planedenn.

Degemer a raimp kambr rannvroel ar c'hontoù a zeuy da ginnig o danevell diwar-benn ar bezhin glas, savet diwar ur c'hinnig a-berzh hor bodadenn. E miz Here e vo kendivizet ganimp diwar-benn kinnigoù ar Rannvro evit delc'her gant ar stourm enep ar walenn-se. Ret eo lakat pep tra war wel abalamour da c'hallout kendivizout da-c'houde en un doare seder war an diskoulmoù nevez da lakaat e pleustr. Evit echuiñ e vo aprouet ganimp, emichañs, hor c'hinnigoù evit reiñ talvoudegezh en-dro d'ar vicher bleiner evit an treuzdougen d'ar skolioù. N'haller ket tremen hep an dud-se. Mont a reont d'ober ailhedenn diwezhañ hor chadenn ha

gant se e ranker doujañ anezho. Ar pezh a fell din lavaret eo ez eus micherioù brav-tre eus micherioù ar servijoù, degaset e oa bet da soñj dimp eus kement-se er mareoù kognañ. N'ankouaomp ket an dra-se.

Ur bloaz zo dija e oamp bet dilennet gant an dud hag enoret on bepred gant ar fiziañs o doa lakaet ennon.

Trugarez da'm skipailh, trugarez deoc'h-holl, e forzh peseurt kostezenn e vefec'h, evit al labour a zo bet kaset da benn.

Evit klozañ e fellfe din kaozeal eus an dour tra m'emañ emgav mererezh lec'hel an dour e Breizh.

Breizh n'he deus ket he far war veur a dachenn, hini an dour en o mesk abalamour d'he stumm douaroniel, d'he douaroù greunitek, d'he diazadoù doureier bihan lies.

Abalamour d'ar perzhioù difer-se e rankomp en em soñjal holl asambles war ar sujed-se er Rannvro, rak-se eo bet krouet bodadenn Breizh an dour. Ne vo ket trawalc'h avat, ezhomm a vo da gas oberoù da benn asambles, oberoù boutin diwar genemglev.

Unan eus an dalc'hoù da zont eo kompren na vez gounezet netra da viken koulz evit kalite an dour (ar pezh a ouzomp) hag evit ar pourvezioù. Arabat gortoz an diouer a zour a-benn kompren eo bresk hor mod da vont en-dro.

Da'm soñj e rankimp labourat war-dro tri fal :

Diarbenn rak sachet e vez tud war-zu Breizh ha gant se e vo ezhomm muioc'h-mui a zour, Espern rak an dour eo hor mad boutin kentañ ha n'eus ket droed da goufoniñ ur mad boutin, Kenskoazell rak an dour eo ar vuhez ha peogwir emañ an dour e Kreiz-Breizh ez eo Kreiz-Breizh ar vuhez, diwar se eo ret d'ar genskoazell etre an tiriadoù e Breizh mont d'ober sichenn hon obererezh.

Diarbenn, Espern, Kenskoazell,

Un triskell kaer eo a-benn ar fin evit digeriñ ar gaoz. Trugarez deoc'h.



Cabinè du Perzident

**DEPLLET DE MONSIEUR LOÏG CHESNAIS-GIRARD,
PERZIDENT DE LA REJION BERTEGN**

Renn, le 30 du maez de jin 2022

Depllet en galo

Ren qu'les mots contés font fa

Bertones, Bertons,

Mes consort-e-s,

La decide de la Court-Mère des Etats-Units de toli le dret a l'avorterie ét escandalouze e de la retourne :

- Je chonje den les fomes, toutes les fomes, les sienes d'Amérique pès core d'âillou den le monde, pour qi qe n-i'a pouint d'ergardance aoqhune. La decide-la ét ene poquée pour yelles, ene demaije a lou dret permier d'avair lou côrp a lou tout par yelles,
- Le dret a l'avorterie ét du cai pour tertout. Et afère de dret oumain, de libertè, de dignetè, d'egaotè, pès core, faot pouint l'oubelier, de portement publique,
- La libertè ét long du temp ene batâille, Y a ren de gagner pour tout le temp, même den les grands democracies, même en France. Le dret-la ét pouint en chalonje -e i devra pouint jameins l'étr. Le chemin pour pouair evorter rest adma e ben doulant. Faot y'étr ben entouée e sourtinze par le monde de la medecine e tout le restant. J'apouye de retour les sienes e les siens qhi sont engagjës su le sujet-la, en permier le monde des consorteries.

L'Urope, a yelle etout son orée de la retourne. Ole se montere pàs meins su son bon les semaines-ci :

- Le Conseil européen a enrayé l'entrée de l'Ukraine dans l'Union européenne. Elle décide vraie conséquence qui montre que l'Europe est point sûrement que les élites. Et ben éne airée politique o des valeurs. La guerre dure core, je devons point l'oublier e je recevons long du temps du monde qui hussant. Je salue tout les méres qui s'engagent e premier la méresse de Rene e son équipe qui pernent ben lou lot.
- La confirmation de l'entrée dans l'UE de la Croatie la prochaine année est core un bon signe au dret tous les financiers. L'Europe a son pouvoir monétaire gardant. J'ons qu'a changer eyou que j'en serions anet o l'encherdisserie e la détournement des finances dans l'UE.
- Pés core les voteries fondatrices du Parlement Européen :
 - Pour être prête d'o la charte terminée e nous mettre au runje la mouvance à venir, e produire les nouveaux services e les nouvelles mécaniques que fait. La Bertègn est engagée sur le chemin. La sera point ézè meins est tenant meillou d'être devant que par derre. Le meillou endroit pour le pétrole est sous terre.
 - Pour mettre une tôle carbone à nos parts qui viendra nous appuyer pour baisser le carbone e rendre plus ézible le retour à la félicité sur place de retour. Le sujet-la regarde l'avenir de l'emploi de la Fonderie de Bertègn. Je suivons l'affaire long le temps.
- Pour le dârain jeu de persévérance française, je veûs saluer les avancées conséquentes. Faot mézè poursuivre e aboutir.

Par après les USA e l'Europe, mézè la France :

Avant que de causer des voteries nationales, une parole sur l'énergie. J'arons vintiés ben de l'énergie de manque pour le bout de l'an. Et à nous aotr, pouvoir publique, d'avoir une parole sur l'attente. Je pouvons, en Bertègn e en France, nous retrouver encrouiller si que je faisons rien de rien.

Je pourpôze dès astoures de relancer notre outil Ecowatt. Je ses que les Bertons sont engagés sur le sujet-la.

L'aviendr-la assolide don les chouéz estratejiqes qe j'ons fèt den notr assemblée a sour fin de mettr a crétr notr aotonomie enerjetiqe, permier o les pllacieries den les enerjies de la mè. I prodieuront lous permiérs eletrons a la perchaine prime.

Pour caozer des voteries de retour :

- Nos voterie nacionales qi sieudent la vie politique de notr payiz sont mézè qhites. Emmanuel Macron a tè relézu Perzident de la Republiqe. Les francaez ont elézu lous reperzentants a l'Assemblée nationale.
- Je salue tous les deputès de l'assemblée, permier les siens de ma majorité, sans oubelier les sienes e les siens qi se taent portès.
- Je souète ouvraijer o tous les parlementous pour le benefi de toute la Bertègn. Et d'assembl qe je pourons porter pus fort la vouéz de la Bertègn a Pariz. Je nous entrvaerons dés la perchaine semaine.
- Ao livè naciona, l'entendement qe j'ons d'amouéz ét pouint la du coup-la.
- Les francaez, pour les siens q'ont tè voter, enrayent sur un rejime parlementier a la "maniere de la proupôzerie" o hardi de cartayerie den la vaerie de l'aviendr.
- Je devons avancer parail su les grands projits :
 - Abouter de terpâsser, refonder notr sisteme de portement, remener pus fort d'egaotè entr le monde, de toutes les menieres e de toutes les âjes, repondr a la berouée du lojis, ouvraijer pour pus fort de sureté, le renforcissement de l'Urope e de sa pllace den le monde. Le monde q'ét de de pus en pus encarbelë o des raports de force de pus en pus portès sur les armées...
 - E le pouair de veqhi seben ! Qe j'eme mai mieûs qe le pouair d'ajeter. La vie ét pouint sourement de pouair ajeter. Un projet economiqe q'a devocion a russi les pâsseries peut pouint y'étr tournë su core e core pus fort d'ajeteries. Notr contrat de societè peut pouint lu marcher si qe le monde peuvent pouint tertout véqhi den la dignetè,

- Je souhaite qe des majorités de projet peujent étr terouées. Faot pouint rester en balant. Faot putôt prendr le temp d'ouvraijer e issi des hucheries des reziaos sociaos. Faot point parier su l'echoaije e l'encrouillaije.

O la France jacobine qe j'ons, Paris encrouillée, la veût y'étr vitement la France encrouillée.

J'ons qe de chonjer den le monde pourqhi qe je sons la. Et pour yeûs aotr qe je devons enrayer ben des chantiérs. Je ses acertainë qe je devons issi par a-haot. Je devons fére de la pâssée-la un temp de renouvè democratique pour le payiz.

Nôs devanciers du CELIB peuvent core nous doner des idées, pâssë les separts o lou firie « jouinter les voulances, respeter les diferences ».

J'eme pus fort l'atrempance pour pouair chomer putôt qe le brut qi mene a ren.

Je pouons issi par a-haot en ozant pus fort d'aonomie pour les terrouérs. O l'etat de l'Assemblée, nôs perlementous, notr gouvernement sont cojës a se chevi yeûs des grands sujits. Si q'i faot y'étr d'agrë su tous les sujits, je n-n'arons du deu. Vére dame, du coup-la, la France sera encrouillée.

Pour se chevi des grands sujits de l'aviendr d'ene nacion, un aotr rolon sera qe de doner pus fort de reponabiletës és rejions. Je ses mai assurë q'ela sera meins un manqe pour notr amaraije jacobin e qi n'en sera pus fort deheûdë.

Le Perzident de la Republiqe a ben ao runje les aféres enternacionales, nôs Ministrs yeûs devient batâiller a Brusselle e su les grands projets.

Faisons don l'eqhipe de France en s'apouyant sur les rejions e les aguerouées.

Je ses mai parë a prendr pour la Bertègn tout le cai a prendr a sour fin de fére avanjer son projet o le gouvernement, o le parlement, o le Perzident de la Republiqe, o la force des elézus bertons.

Su le sujet de l'autonomie, notre souéon terpartizant arive lu ben son oure pour fére runjer su des idées, montrer qe la Bertègn set ben qhi q'o veût, q'o set se defendr e ensourqetout, q'o set porter ses idées.

Mes consort·e·s,

La grande assemblée-la mettra de retour a la rolée des ouvraijes la vie du tous les jous des Bertons e l'aviendr de la Bertègn :

J'arons des premières devizées su notre estratejije rejionale des terpâsseries économiques e sociales. Faot puint n-n'avair poûr. Les changements qi s'arivent vont y'étr vra conséquents tant ao livè économique, social e qe de l'entour.

Je ferons un puint su nos licés e la maniere d'ajeter pour étr fonabl pour les liceyens e la pplanete.

J'alons recevoir la Chambr rejionale des contes pour nous perzenter son rapport su les algues vertes. Et ene idée issue de notre assemblée.

J'arons en octobre ene devizerie sur les idées de la Rejion pour nous deféer du ma-la. N-i'a ren a qhuter. Faot pouair devizer tranqhilement su le cai nouvial a mettr ap roule.

Pour fini, je voterons, je le souète mai, notre voullance pour envallourer le metier de menou pour le chârriaije ecolier. Je pouons ren fére sans yeûs. Ils sont la darâine boucl de notre chaîne e i devient n-n'avair de l'ergardance en consequence. Je veûs dire qe les metiêrs de service sont des biaux metiêrs. Je nous en sons ben avizés durant l'embârement. Je devons puint l'oubelier.

Vaici ene anée de temp qe les elézous e les elézoueres nous ont elézés. Je ses core oneurè de lou fiance après ene année de temp.

Merci a mon eqhipe, merci a tertout sietès ilë pour l'ouvraije abatue.

Je vouraes abouter mon depllet su le sujet de l'ève, just ao moment du cârouje des jérieres locales de l'ève en Bertègn.

La Bertègn ét a son apart su ben des sujits dont le sien de l'ève o son amaraïje jeyografique, son fond de roche de grain o hardi de coulées versantes.

L'apart-la qemande de runjer ao livè de la Rejion. Et la l'idée de l'assemblée bertone de l'ève.

La va pouint y'étr sufizant assë. Va falair ouvraïjer de domë.

En-méle les defis a viendr, j'ons le sien de mettr ao runje qe ren ét pouint jameins gagnë pour la calitè de l'ève (je le savons ben mézë) e la cantitè d'otout. N'esperons pouint de y'étr privé d'ève pour nous avizer qe notr sisteme ét fâilli.

J'arons a ouvraïjer, je chonje mai, entour traez voulances :

Le paravançaije. Notr rejion atire le monde. Ole ara des bezains de pus en pus,

Le mezuraije. L'ève ét notr permier cai de qemun. J'ons pouint le dret de le saveter,

E l'entr-partaije. Si qe l'ève c'ët la vie, qe l'ève ét ao mitan de la Bertègn, aloure d'ela le mitan de la Bertègn c'ët la vie, e nen det mettr le partaije ao mitan de notr fezerie.

Paravançaije, Mezuraije, Entr-partaije,

Vela pour fini un biao triskell pour enrayer nôs devizeries. Merci bel-e-ben.